

Añs Pouldon

Ul lec'h diskuizhañ ha debriñ a bouez er vro evit al laboused dour o tremen pe o c'hoañviñ.

Un nebeud kemennoù evit chom hep trubuilhañ al laboused hag evit gwareziñ o annezva naturel

An trouz hag ar jestroù trumm eo an abegoù pennañ a c'hall trubuilhañ loened al lec'h. Pouezus eo eta :

- chom hep diskenn war an aod vev ha mont gant an hent balizennet,
- rollañ ho chas,
- arvestiñ didrouz ouzh al loened gouez.

Kevelerien

Labourioù da serriñ an hentoù da vont d'an aod vev, empennañ ha sevel panelloù pedagogel evit sachañ evezh an dud war gwarez al loened pluñv, graet gant Kumuniezh-kumunioù Su ar Vro Vigoudenn, gant sikourioù :



L'Europe s'engage en Bretagne



PRÉFET DE LA RÉGION BRETAGNE

MINISTÈRE DE LA TRANSITION ÉCOLOGIQUE



COMBRIT-SAINTE-MARINE KOMBRID-SANT-VORAN

Labourioù da zigeriñ ha da gempenn an hent darempred evit an dud war droad a-hed an aod e tolead Pouldon e kumun Kombrid Sant-Voran, graet gant Kumuniezh-kumunioù Su ar Vro Vigoudenn, gant sikourioù :



FRANCE VUE SUR MER




Eus miz Gwengolo betek miz Meurzh e c'haller gwelet ingal war-dro daou-ugent spesad laboused ha betek 10 000 labous en añs Pouldon.

(Hirder keitat e santimetrou / hed-eskell keitat e santimetrou)



Houad penn ruz




Gardeli boutin



Strelleg pavioù ruz



Salikorn




Lec'hidegoù (slikke) ha pradoù-sall, ul liesseurted ekologel da wareziñ

Al lec'hidegoù hag ar pradoù-sall a ya d'ober takadoù ec'hon en añs Pouldon. Goloet e vezont ingal pe ingaloc'h gant ar mareoù hag hervez an dra-se e kresk plant dibar d'an aberioù hag e c'hall laboused diskuizhañ ha debriñ eno. El lec'hid berniet ez eus mikro-organegoù, blotviled, krestenedeg ha preñved o neriñ. Binvioù azas o deus al laboused evit ober chegenn ganto : pigosoù kromm, begek pe plat evit dibab pe furchal, pavioù hir kuit d'en em em c'hlebiañ.

Troad-gwazi-palud



Spanell wenn



Avosetenn vistr

